

istance

(Morlaix)

S'ILS TE MORDENT MORDS-LES

UR EN CHEF :

AVALLIER

Rue de Ploujean

TARIF DES ANNONCES

Annonces judiciaires : la ligne, 20 centimes. — Annonces diverses, la ligne, 20 centimes. — Réclames (en 3^e page), la ligne, 40 centimes.

On traite de gré à gré tous les jours au bureau du journal, et à Paris chez M. DE LARNAGE, 28, rue Saint-Lazare.

ho kelennadurez da dalvezout kalz dezho, grit implij euz ar brezounek evit deski dezho ar gallek. »

Ia sur ; hag eu em ober kement-se ann holl o devezo da c'hounid : c'hui da genta, mistri ha mestrezed skol ; pa zeuz bet great evelse, pa zeus bet desket d'ar vugale lenn ar brezounek, pa zeuz bet great implij euz eur iez anavezet evit deski eur iez all ha ne oa ket anavezet c'hoaz, ar vugale, ranket e zeo bet e anzav, o deuz desket e daou viz kement hag a c'hellent deski gant poan c'hoaz, en eiz pe nao miz er c'hiz all. — Ar bugel a c'hounezo ive : ar pez an devezo desket, a vezo muioc'h henvel oc'h komzou ha gizioù ar re ma ranko beva gantho, karet a raio muioc'h ar vro m'a zeo bet ganet, he spered a vezo kelennet guelloc'h, daou iez a anavezo, ha gant nebutoc'h a boan ive e c'hello deski ar gallek.

Re all ouspenn, ar gerent ho unan, a en em gavo gwelloc'h : ho bugale ne vezint ket evel divroidi evitho, hag a zoujo anezho muioc'h ; kounta a c'hellint ive d'ho zad, d'ho mamm, d'ho zud enn eur ger, eunn draik bennag ouz an traou o devezo desket er skolioù.

Ar vro erfin a vezo neuze braoc'h dezhi : rag hor bugale, stag ouz ho bro evel a c'houzomp, ha stag ive ouz ar relijion gristen, ne raint mui forz euz ar pez a lennint ho unan pe a glevint lenn er c'hazetennou fall, ha pa vezo pelloc'h goazed anezho, e tisprizint hag e taolint pell dioutho faltazioù sot ha fall an dispac'herien euz hon amzer.

AN DELEN HAG AR BARZ

An delen

N'eo ket er penn, n'eo ket er genou e klasker, — Pa vèr en gwirione c'hanotaüs da draou kaër. — Tostoc'h d'ene an den, dounoc'h en diabarz — 'N'hini klever ar vouez a dle dihun ar Barz. — Er galon 'n hini sao mammen ar gwir vuez, — Eno en em dastum tensoriou an druez, — Ar garante nerzus, ar spi glan ha santel, — Hag ar Boan, gwella mestr a zo da rei kentel. — Deus gand eun alc'houe aour en arc'h-ze da furchal — Hag e kavi bleunioù kuzet aboue gwechall : — Lili gwen an amzer ma valeed dinam, — Lapousik diwallet dindan askell e vam, — Rozennou lugernus an amzer ma kreder — Na vò barz ar vuez nemed deiou zeder ; — Bleunioù glac'har, savet war bez ar re varo, — Bleunioù gwez, a ziwan war ar rech'ier garo, — Ha dreist-oll, vel eur zonz krenv ha padus meurbed, — Sonj eur vam, ar vlieuen dous a zo dre ar bed ! — Oh ! Kan da-viana da vam ha gavel !

Ar barz

Nan. Na glevo morse an dud, nag an avel — Gwerz va bugaleaj war va lerc'h o tistôn. — Hün a rai da viken en gweled va c'halon.

T. AR GARREK.

ECHOS

L'ignoble campagne menée par certaines feuilles contre les maîtres de l'enseignement congréganiste à propos du drame de Lille, dépasse en vilénie et en mauvaise foi tout ce que l'on peut imaginer.

Cette attitude est d'autant plus écœurante que rien n'est encore venu confirmer les premiers soupçons du juge d'instruction contre le frère Flamidien et que même, les prétendues charges relevées contre ce religieux n'ont pas résisté à un

hag a zoujo anezho muioc'h ; kounta a c'hellint ive d'ho zad, d'ho mamm, d'ho zud enn eur ger, eunn draik bennag ouz an traou o devezo desket er skoliou.

Ar vro erfin a vezo neuze braoc'h dezhi : rag hor bugale, stag ouz ho bro evel a c'houzomp, ha stag ive ouz ar relijion gristen, ne raint mui forz euz ar pezh a lennint ho unan pe a glevint lenn er c'hazetennou fall, ha pa vezo pelloc'h goazed anezho, e tisprizint hag e taolint pell dioutho faltaziou sot ha fall an dispac'herien euz hon amzer.

AN DELEN HAG AR BARZ

An digor barzoneg kaër e lennot ama varlerc'h a zo savet gand an Aot. Garrek, eur barz euz an dibab, koulz en brezounek evel en gallek. Teurvezet an deuz roi d'in e zournskrid, var va c'hinnig da ober moulla anezan. Teulit evez mad pegen uhel sonjezonou ez eus er pennad-ma, ha pegen mad distagellet eo ar rimen da bep tro. F. JAFFRENOU.

An delen

Sao alese, Barzik, tenn d'in euz va c'halon — Ar meulodi gaërta hag al lirezina zôn.

Ar barz

Na perag kana ken ? Rafemp ket gwell ehan — P'eo gwir den, pa ganomp, na selaou euz hon c'han ? — N'eo ket koulz d'in terri va fluen dizec'het — Ha mougata vid eur wech da vouez ankounac'het ? — Trubard eo ar bed-oll ekenver ar Varzed : — Deuz a dost o meuler, dreg o c'hein vé c'hoazet, — Ha mar bê sellet piz, war o fenn na gaver — 'Med eur gurunen spern vel hini hon Zalver. — Kanet awalc'h hon euz hon daou war an douar — Evid eur bed-all, unanet gand laz-kân (1) an elez — Ni zavo gwerziou kaër hed ar beurbadelez !

An delen

Daoust hag ar Barz a gan vid bea selaouet ? — Gra vel an eostik noz : e vouezik alaouret — Na ear ken c'houitellat sônou e garante — Nemed pell euz an dud, euz an drouz, euz an de. — Gra 'vel an alc'houeder a gan toull dor an ne, — Pa na gleo tro-war-dro 'med sioulder ar mene. — Vidan dud da oapaat, vid ar bed da c'hoarzin, — Bale war ar roudou digoret gand Marzin, — Kan bepred an oll draou din da vea kanet — Ha zao da benn, n'euz fors petra vô lavaret.

Ar barz

Ha petra ganin d'id, va zelennik leal ? — Kemend sôn kaër a oa n'euz paket ar re-all. — En liorz ar Varzed, ar brasa sperejou — O tastum an oll froez hag an oll bokejou — N'o deuz lezet netra gand ar re diveza — 'Med traou koz, hag a lak al lenner da faëza. — Kaër 'meuz sevel va fenn etresek ar stered, — Digomz eo va genou, ha goullou va spered.

(1) Laz-kân : Chœur. Cf. Laz-Dorna. Ar ger az-kân zo great war ar patrom-se.